


ANN DISLOUNK-TAN

Distruj Sant-Per ar Martinik.

Daou-ugent mil den maro.



'VEL DA FIN AR BED

Gwelomp, gwelomp, skuillomp daëlou ;
Ar bed holl a zo en kanvou,
Ar Frans spountet ha strafuilet
Kleo ar pez a zo c'hoarvezet !

SANT-PER AR MARTINIK

A veb amzer ar Martinik
A zo bet eur vro vuzoudik,
Dismantret sioaz a vep mar
Gant gwalennoù braz ann douar !

Ann dour, ann tan, ar mor diroll,
Ar c'hren-douar, ann avel foll,
A skign warnezhi bep eil tro
Ar spount, ann dismantr, ar maro !

He brassa ker, Sant-Per e oa
Eur gerik dimeuz ar brava
Savet en tro war bord ar mor

En he flas ne oa ken breman
Nemet eul lenn vraz ha ledan,
Ha keriz zeue d'he c'hichen
Heb aoun ha dinec'h da bourmen.

AROK ANN DISMANTR

Hogen d'ann dri euz a viz Mae
E oa gwelet uz ar mene
Koumoulennou teo a voged
O sevel en oabl entannet.

Ar mene evel e kounar,
A gren, a c'hrosmol e bep mar,
Hag he volkan vraz sklan ludu

'VEL DA FIN AR BED

Gwelomp, gwelomp, skuillomp daëlou ;
Ar bed holl a zo en kanvou,
Ar Frans spountet ha strafuilet
Kleo ar pez a zo c'hoarvezet !

Ker Sant-Per, deuz ar Martinik,
Porz-mor brudet ha pinvidik,
Zo distrujet holl gant glao tan
Ha glao pri bero eur volkan !

Daou-ugent mil den pe ouspen,
Eur c'hart euz tud ann enezen,
Deuz siouaz kavet ho maro
E ker, war vor ha tro war dro !

Abaoue beuz-vraz ann diluj,
Neuz ket gwelet eur seurt distruj,
Ha biskoaz brec'h pouner Doue
E deuz skoet ken didrue !

Eur vro holl a zo distrujet
Gant ar glao-tan ha soufr teuzet !
'Vel gwech-all Comor ha Sodom,
Pompéi ha Herculanium.

Ann dour, ann tan, ar mor diroll,
Ar c'hren-douar, ann avel foll,
A skign warnezhi bep eil tro
Ar spount, ann dismantr, ar maro !

He brassa ker, Sant-Per e oa
Eur gerik demeuz ar brava
Savet en tro war bord ar mor
Evel eunn anter kelc'h digor.

Eur mene hanvet ar Pele,
Nao c'hart leo bale ac'hane,
He gwaskede euz ann avel
Pa c'houeze demeuz ann huel.

He forz-mor oa darempredet
Gant listri pevar c'horn ar bed
O vont o tont gant prez bemdez
Kas ha tigas marc'hadourez.

Be oa enghi tregont mil den,
En ho mesk kalz a Fransisien
Euz Marseill, Bourdel hag ivez
Deuz a Vrest hag ann Haur-Nevez.

Gwech-all volkan mene Pele
A daole tan a vep mare,
Mez 'baoue anter-kant vloa zo
Ann holl a grede ca maro.

Hogen d'ann dri euz a viz Mae
E oa gwelet uz ar mene
Koumoulennou teo a voged
O sevel en oabl entannet.

Ar mene evel e kounar,
A gren, a c'hrosmol e bep mar,
Hag he volkan vraz sklap ludu
Pell en dro dezhi a bep tu.

D'ar bemp, eur ster ledan a bri
Zired anezhan 'n'eur virvi
Ha 'n'eur zistruja holl kement
Tra a n'em gave war he c'hent !

Kant anter-kant den oa tapet
Ganthi, ha siouaz enterret
En beo ebarz ar pri bero,
O pebeuz planeden garo !

Diwar-neuze beg ar volkan
Na 'han da c'hourdrouz, da daol tan,
Ha gant ar spount tud ar meziou
Zeu da Zant-Per a strolladou.

Na wien ket siouaz dezho
Oan vont war eon d'ar maro,
Rag den ebet nije kredet
Oa ker war var beza devet !

ANN DISMANTR

D'ar Iaou-Bask tri devez goude
War-dro eiz eur deuz ar beure
O tra spountuz ma oa biskoaz
Lein ar mene a zigoraz !

Intraillou bero ann douar
A strink 'n'eur strakal d'ann ear,
Ken a c'horjel ann enezen
Holl war he fonz 'vel eunn delien !

Ann douar a faout, a zigor ;
Ar vein n'em vruzun, hag ar mor
Gant ann dinerz e oa sklapet
War he giz 'spen pemp kant troatet !

Ker Sant-Per e oa ker buhan
Goloet dindan eur mor a dan,
A flamm, a vein, a bri bero,
A draou teuzet ha heb hano !

Uz ker, ar moked, al ludu
A re eunn noz tental ha du,
Sklerijennet heb ehana
Gant ar flammou tan o koueza !

Ann dud strafuilet gant ar spount
A c'haloup du-man ha du-hont,
Mez holl a renkont chom siouaz
Da c'hrilla ebarz ar forn vraz !

Darn a zeuaz da vord ar mour
Soujal martreze kaout sikour ;
Mez heman e oa he hunan
Goloet gant eur vantel a dan !

He listri e oa holl e flamm,
Hag holl siouaz 'met ar *Rodam*
Int bet devet ha distrujet
Digant ar flammou miliget !

Ar *Rodam* na c'hellas n'en denn
Nemet 'n'eur droc'hi he chadenn
Ha 'n'eur gerzet diveur dioc'htu
Dre vesk ar glao tan ha ludu.

Pa zigonezaz e Porz-Castri,
Nay eur goude hi ne oa mui
Nemet eur skeud du heb hano,
War he font daouzek korf maro !

AR ZIKOUR

'Pad ann amzer-ze ar *Suchet*
Zeu dirak ar ger zistrujet
Daoust ha penaoz c'hello tostaat
Anezhi gant grouez ann tantat !

Ar vro holl n'eo c'hoaz nemet tan
Hag uz dezhi beg ar volkan
A c'hrosmol hag a sklap bepred
Torchadou flamm, tan ha moked !

Gouskoude he zud kennerzuz
E riskl kaout eur maro euzuz
Red dre vesk ann tan hag ar vrouez
Evit kas sikour d'ann dud kez !

Mez e ker ne oa siouaz mui
Netra veo ebet ken enghi,
Oa 'met bernou korfou maro
E mesk ann atrejou bero !

Ar ruiou hag ann tachennou
Oa holl goloet a relegou
Ken du evel pa vijen bet
Devet digant goudron birvet !

Biskoaz ar gwall-eur neuz skoet
Ken stard ha ken kre war ar bed,
Biskoaz falc'h garo ann ankou
Neuz skoet ken stank he zaoliou !

Rag tra estlammuz pa zonjer
Euz tregont mil den oa e ker,
Nikun ebet e deuz gallet
Tec'hel euz ann tan miliget.

Euz pez oa kent eur gerik vrao
Ne deuz mui netra en he zao,
Neuz anezhi 'met eur vro zu
Goloet a c'hlaou hag a ludu.

Pebeuz kentel vraz 'vit ann dud
Pere na reont met n'em zispit
Ha n'em zibri war ar bed-man
'Vit mont ken buhan anezhan.

Kolaïk P.

(Tous droits réservés.)

Tout contrefacteur sera puni d'une amende de
100 fr. à 2,000 fr., et le vendeur, d'une amende de
25 fr. à 500 fr. *(Code pénal, art. 427.)*



Uz ker, ar moged, al ludu
A re eunn noz tenval ha du,
Sklerijennet heb ehana
Gant ar flammou tan o koueza !

Ann dud strafuilet gant ar spount
A c'haloup du-man ha du-hont,
Mez holl a renkont chom siouaz
Da c'hrilla ebarz ar forn vraz !

Darn a zeuaz da vord ar mour
Sonjal martreze kaout sikour ;
Mez heman e oa he hunan
Goloet gant eur vantel a dan !

Ar vro holl n'eo c'hoaz nemet tan
Hag uz dezhi beg ar volkan
A c'hrosmol hag a sklap bepred
Torchadou flamm, tan ha moged !

Gouskoude he zud kennerzuz
E riskl kaout eur maro euzuz
Red dre vesk ann tan hag ar vrouez
Evit kas sikour d'ann dud kez !

Mez e ker ne oa siouaz mui
Netra veo ebet ken enghi,
Oa 'met bernou korfou maro
E mesk ann atrejou bero !

Pere ha teont met n'em zisput
Ha n'em zibri war ar bed-man
'Vit mont ken buhan anezhan.

Kolaik P.

(Tous droits réservés.)

Tout contrefacteur sera puni d'une amende de
100 fr. à 2,000 fr., et le vendeur, d'une amende de
25 fr. à 500 fr. *(Code pénal, art. 427.)*



Quimper, impr. 18, rue des Boucheries